



Photo CHARROUIN, St-Pol-de-Léon.

SON

Va Dousik. Koant

Son ha ton nevez



I

Ma karit rei d'in eun tammik peoc'h
 Em beuz sonj da gana d'eoc'h,
 Rag pell-zo e zoa em santimant
 Kana d'eoc'h son va dousik koant.

II

Gant he bleo du, hi zo ker mignon
 Ma stag da dridal va c'halon,
 Me a sonj d'in n'euz ket war ar bet
 Ker koant evel ma muia karet.

III

~~Pa vez ganthi he jikoloden~~
~~Pozet ker brao war he fenn~~
~~Hi vez kaeroc'h 'vit eur rouanez,~~
~~Evit'h me rose va buez.~~

IV

He daoulagad noz-dei o vrilla
 'Zo ker kaer ha leun a joa
 'Vel ar stered zo er firmamant
 O va dousik na te a zo koant.

V

Pa vezan awechou chagrinet
 P' erru varnhon ar boan speret,
 Pa sonjan ennout va dousik koant
 Dioe'htu e passe d'in va foan

VI

En despet d'an teodou zo er vro
 Ennout, noz deiz me a sonjo;
 Rag den ebet me na selaouin,
 Karout 'rən re va mestrez divin.

VII

Ma vije an teodou selaouet
 Jamez den vije eureujet,
 Rag n'int ket mad nemet da gass brud
 Ha d' lakat sachiri 'tre an dud.

VIII

Ha te va dous, ouz da gostez
 Kass an teodou fall da bourmen,
 Evelse, en dervez a zeuio.
 Sur asamblez ni a zimezo.

IX

Da c'chedal ma erruo an dervez
 Ma zeomp da veva asamblez,
 Dalec'homp tost an eil d'egile
 Ma chomo etrezomp amitié.

X

Araok echui va chanson
 Rankan lavarat d'id mignon
 Kred ac'hanon me vezoz kountant
 Pa c'hellen kouskat gant va dousik koant